

Pobl Vreizh

C'hwevrer 1981 - niv. 130

4



*D'ar sadorn 24 a vis
Genveur, kerzhadeg
etre ti-ger Rosporden
hag heni Konk-Kornow,
ewid difenn linennoù
hent-houarn Breizh : ar
re ned sont ket da
Baris war-eeun zo dre
harz bezañ serret, ma
chomomp kousket...*

**HARPIT
POBL VREIZH**
KRP 2746-79 ROAZON
CCP RENNES

7^e listennad

M. Oppici, Gabon	40.00
J. Sauban, Douarnenez	20.00
S. Marchal, Levallois-Perret (92)	10.00
Y. Chapel, Brest	20.00
X. Anquer, Kemper	60.00
A. Colleau, Tours (37)	20.00
P. Le Goualle, Laval (53)	10.00
E. Locker, Mauvezin (32)	20.00
M. J. Alanot, An Oriant	30.00
Y. Georgelin, Paris (75)	20.00
V.V. Le Montreier, Logivill-Lannuon	60.00
C. Pierre, Poulouen	10.00
A. Servat, Chollet (49)	10.00
E. Coen, Caen (14)	20.00
K. Brisson, Plougastell	20.00
J.P. Quelvenec, Brasparz	20.00
J.J. Colleau, Clamart (92)	20.00
D. Soublin	40.00
Sotteville-les-Rouen (76)	20.00
F. Allain, Ploisane	110.00
570.00	
Diwar al listennadoù all	2500.00
3070.00	

« Ranesenn » a vez gwraet dre z-mañ eus an henti a vez dalc'hmad o c'hlaoussad, pe pa vez kavet re hir ha re randonus ar c'haosioù a vez gantañ... Ahanta ! « Ranesenn » awalc'h e vezomp amañ, pa ne zeuomp ket a-benn, beb mis, da lured ha da skrivañ nemed ar memes ger dalc'hmad « TRUGAREZ ». Ha koukoude, n'eus ket kant mod da roñ da c'hoùd, dre gomzou, an anaoudegezh vad hon eus ewid madoberourion POBL VREIZH. Na kant ger : en tu all d'ar ger « bras » TRUGAREZ, petra c'hellomp lared c'hoazh ? MERSI, MERSI BRAS, BENNOZH (IDUE) DEOC'H, lennerion ha komanantour ger « mis-mañ » c'hoazh ez oc'h bet brokus, ken brokus ha ma chormid didrous ha sioul ; ur charis eo c'hoazh d'an henti na oar ket kaer skrivañ e brezhoneg, e c'hell memestra ober ur chekenn, unan vad ha « ponner » da roñ skoaell d'hor c'helaouenn politikel nemet : POBL VREIZH.

Ya, trugarez bras deoc'h all : d'ar re a gass arc'hant da b/POBL VREIZH, en tu all d'o c'hoanant, ha d'ar re a zalc'h da lenn POBL VREIZH, petra bennag ma vez diaes ewite marteze lenn brezhoneg ma n'ousont ket re vad ar yezh.

Hirrad a ra an dez, un drugar. Ewid amañ e Breizh-Izel, n'eo ket gwall gales ar gouariv. Tammoù skorn a vez, mes nebeud. Sed e c'hell ar spered chom lerm ha war ewezh. Ezomm bras zo da chom war ewezh. Rag n'eo ket aes, e-touesk ar bec'h hag ar delc'h, dre da goud ur spered dispari. Na goud ervad e-pelec'h ha gant piw e vez ar wirionez.

N'hon eus ket ni, emrennerion Vreizh eus an tu kleiz, an tu da strewiñ hor menno-sioù, peogwir, ewidomp, ez eo stanket an henti a gass d'al leurenne-brezeg eus an amzer-vremañ : gn. tele-Red ha ped glabousser a vez gwelet ha klewet — ne vezont ket selouet oll —, a-hed ar bloaz, o tibunar o ranesenn-ezazh, na vez hanv unnar biskoazh nag eus pobl Vreizh nag eus he c'hoant da vezañ hi e penn he zraou ! Ha bremañ, p'ema botadeg vras ar 26 a vis Ebrel o tostaad, gant piw e vo roet da c'hoùd d'ar Frañsision ez eus ar Frañs, ya, e-barzh ar Republik unvan ha disannadus, meur a bobl, ha pobl Vreizh en o zouesk, o c'hortos an eur ma vo kemeret gante ar stur, ma vo « roet » dehe o frankisoù politikel.

Pessorit demokratelezh eo honnezh ma vez nac'het enni kement hag a sell, ken tost, douzh an demokratelezh endeeun : ar gwir d'ar « rannvroù » d'ober-int-i o hunan wardio o aferoù ? Red e vo bremañ bezañ war ewezh, teuler ewezh bras : meur a ganfar eus an tu kleiz a em gavo war ar renk, ewid klask tapoud mouezhoù. Brav deomp c'hoazh pa c'hellomp votin : e broioù zo ne c'heller ket. Mes, pa votomp, ne vez nemed ewid Frañsision, marse ewid Bretoned. Bez e c'hell ar C'hallaoued a zo o chom hag o vevañ e-diabarzh kompenn veur Paris en em gavoud en o bleud gant ar framadur gall evel m'ema. Ewidomp-ni Bretoned avad, n'omp ket laouen gantañ tamm ebod, peogwir ez omp nac'het, « teuzet », diverket ewid Bretoned.

An tu kleiz gall zo mad ewidomp beteg ur serpen poent. Dre ma 'z eo an tu kleiz. Med pas dre m'eo gall. Ewid komz eus an daou vridetañ eus re an tu kleiz gall o vont war ar renk, MITTERRAND ha MARCHAIS, sed ase daou zen hag a zo Galloued penn-kil ha-troad, Frañsision ha Galloued. Bez ez int o daou bugale d'an Dispac'h gall, ar perzhioù mad anezhañ med kenkoulz all ar perzhioù gwan. Bugale int ive, beteg ur

KOMANANTOU


P	boutin : 40 L	V
O	skoaz : 60 L	R
P	peuzhpenn	E
B	KRP ROAZON	I
L	2746-79	H
Z	C.C.P. RENNES	

Ti-Moullerezh « Iroise »
29200 Brest
Rener ar Gallaoued
Fañch Morvanou C.P.P.A. 50 091
1500 skwaren

serren poent, d'an dispac'h micherour hag etrevredañ e 1871, 1917 ha... 1920 zo bloavezhiennoù hag a gont ewite. Med gwall dechet int o daou da vezañ broadelourion c'hall. Da lavared eo, e savont uhel ar banniel triliw —, ur tre kement ha DEBRE memestra —, ur banniel hag a zo heni ur Stad leun a lorc'h hag a c'hallaoued, petra bennag m'eo bet distraet gant an digolonisañ. Ni iwe, Bretoned eus an tu kleiz, ez eus ananomp broadelourion, pe emrennerion da vitanhañ. Med' un diforc'h bras zo etre an div vroadelourerzh : o heni dehe a daol he bannoù poll ha gant nerzh ; hon heni dimp-ni zo unan nac'het, gwasket, flastret, broaset, ha, siwazh !, bet saotret mui pe vuñ un daou-ugent vloaz so bennag...

Frañsision omp, dre ar gwiniou keodour hon eus : kement-se tapet eo. Med Galloued n'omp ket. Ewid ar Stad omp staget douti, e talv « Galloued » kement ha « Frañsision », ha « Frañsision » kement ha « Galloued ». Mad ar jeu neuse ewid ar C'hallaoued eus an tu kleiz. Med ewidomp-ni Bretoned, mad omp Frañsision. Galloued n'omp ket. Ha Breizh, ewid ar Stad C'hall, hag ewid paotred an tu kleiz gall, n'eus anezhi nemed un hanv war ur gartenn, hag un draig bennag — nevez so — war dachenn ar c'hultur. Mes ar c'hultur-se a vez gwraet anezhañ gant ar Frañsision-Gallaoued e unan eus kulturioù ar Frañs. Ha setu ni paket adarre. Ewid gwir, n'he deus ket ar Frañs ur bern istim ewid he c'hulturioù pobl. Mes n'eo ket eno emañ an dalc'h. An dalc'h zo : penaos votin war an tu kleiz gall, en ur roñ da c'hoùd ne vougomp ket ewid se hor mouezh-ni ? Marteze ez eus un douelladen all o soñjal e raio ur President eus an tu kleiz gwelloc'h ewid GISCARD. D'an nebeutañ, gant an tu kleiz gwirion (pas gant unan skarnlet), e c'heller kaoud un tamm fiziañ bennag, rag, sariset, ez eus, e-diabarzh an tu kleiz, ul lañs warzu an da-kont, un merzh o kass tremas an emdroadur hag ar chachamant. Kredomp eta, beteg goud hirroc'h, ez eo red bremañ tarin e lañs da GISCARD ha d'ar re heñvel outañ. Torromp eta e lañs da GISCARD. Gwelloc'h eo moarvad an tu kleiz gall eged an tu dehou gall : gall int o daou, mes fallag ha pilpous meurbed eo an tu dehou, ha dreistoll GISCARD. Fiziañ hon eus n'eo ket re ken fallag an tu kleiz gall : setu e vo mad deomp, d'an 26 a vis Ebrel, votin war an tu-se. N'eo ket deuet an eur c'hoazh, gwir eo, mes poent bras eo dimp-ni, emrennerion Vreizh eus an tu kleiz, e em soñjal...

RADIO - U.D.B.
Tel. (16.98) 80.18.47



Ewid da vezañ ur barres gwall vitan, 700 bennag a dud o chom enni, e klask Lokorn, pe kentoc'h, ar re a zo en he fenn, brannañ etre o diwskoaz. Lodennet eo ar « galloud » etre ar « S.I-ourien » hag an ti-kêr, bec'h ar prefetioù o pouesañ, dalc'hmad koulz lavared, war hemañ. Bez e vez luskadou e-leizh, o lakaet fichañ al leuzer da skwer, med ne vez war o gotre tamm liw-dispac'h ebod. Skrivet eo bet koulikoude istor ar barres gant dour-c'hwes, dienas, ha gant ar fac bet gwraet war kement ha kement a dud vunud, o micher bezañ, lod dewezhoerien, lod al gwiederien, pe c'hoazh panerourien, torc'herien brug, pikieren vein... Red eo anzav ne oa ket kont c'hoazh en amzer-se eus an douristelezh : gant homañ ez eus bet degaset da gériadenn Lokorn un tamm mad a vrud.

Pa vez kaos eus vakañsoù hag eus touristelezh, e ranker lavared ez eo bet a-viskoazh — abaoe ma 'z eus anezo — gwall dreud ar gouinidou o dont diwarno, e skoaz ar vrenadurezh deuet d'o heul e-barzh ar vro-mañ. Abell zo e oa daw bezañ war soñj, ha gouzoud ne vez ket savet ur c'hlieuz eus un tu nemedken. Rag, pa vez taolet ur sell douzh an tu all d'ar gartenn-bost, e c'heller gwelad, aes tre, pegen c'hwerv ha pegen reuseudig ez eo stad tud so : ar re-mañ ne vezont ket gwelet o vont d'ober kofige rous war an aod pa vez heol splann an hañv en e gaerfañ. Nag a dud e vez red dezo chañch o mod da vevañ abalamour d'ar vakañserien : daw 'vez dezo chom daou pe dri mis e-barzh o c'haw pe e-barzh o grignol... Ar bed war an tu gin...

O vezañ m'eo kouezet en he foull ekonomiezh ar vro, ez eo pec'hed klenn, e embann krak-ha-krenn kan-

farded ar S.I ; ma teu beteg enomp ar yar he viot aour (an douristelezh), arabed ha lazhañ. Daw eo laoskañ anezhi da skrapañ an douar war hon leur-ni, kement ha m'he do c'hoant ; daw eo plegan da lesenn an degemer, en desped d'ar gwiskad liw pilpouse-rezh a vez lakaet da guzhad ar wirionez. E ti-kêr Lokorn en deus kavet bod, abaoe pell zo, ar pilpouse-rezh emañ o safarñ diwar e benn. Hag arabad d'an den chom e veg digor gantañ, pa glew tud e karg, dileuridi ar boblañ, o kemenn emaint a-du gant diazevad ar soudarded e Ti-Voujeret. Setu ase touristad e vod nevez hag a bly dezou rusañ o boteter ter kaled war baveziou rust straedoù Lokorn, kement hag en em ziskouez, ar pezh a dalvez moarvad e-barzh an empenñ a c'helle bezañ kavet dindan o fennou tousez : « Bez' emañomp



amañ ewid chom ! »


En ti-kêr, ne vez ket kaos, e mod ebod, eweljust, eus politikezh. Amañ, war ar maes, e oar an dud tremen heb ar si-se, ha mont, kleiz ha dehou, da votin kassel-ha-kasel, dorn-ha-dorn, goude bezañ bet pesketaet en ur mor a vannac'hou gwir ruz. Du-mañ ne vez ket politikezh en ti-kêr, en ostalerioù ne larañ ket.

Da vare « enklask-digor » Plogoñv, e oa bet goulet digant ar c'hulsi ti-kêr diskleriañ en ur mod fraezh ha splann pere 'oa e soñjoù diwarbenn kement a oa o c'hoarvezoud e-barzh tachen ar C'hap. Ken trubuillet e oa an Aotrou Maer gant an aon da vrammañ a-dreus, m'en doa ewit, kent-let sitioar ar barres, lakaet e gusulierien da « ragvouezhiañ », ewid gouzoud hag-eñv e talvez ar boan en em ziskleriañ war se. E-mod-se omp deuet a-benn da c'hoazh deomp persont boued a vage o nepruezh, ha setu amañ disoc'hou an mouezherezh, 12 a gusulierion o vezañ bet kemeret perzh enañ :

- 5 o deus soñjet n'en doa ket ar c'hulsi ti-kêr da ziskleriañ e santimant ;
- 2 o deus soñjet ar c'hontrol ;
- 5 all zo bet chomet divnenn.

Hag a-istribilh douzh moger sal ar c'hulsi ti-kêr, e talc'h Giscard da c'hoarzhin, trec'h ma chom war ar falskredennou a c'hell a-wechou kemer gwirizoù e spered tud so !

Bez' e c'heller abendall ober un tamm meneg eus buhez ar barres, ur vuhez kouezet warni ur wall blanedantont ; er bloaz 1980 ez eus bet en tu all da agent interamant, pa n'eus bet nemed ur c'hrouadur o dont war an douar. Ur wech dre vare e sav an douar.



UR « RADIO FRANKIS » ADARRE !

Herwez ar « Charte culturelle » kenniget d'ar Vretoned gant Giscard d'Estaing, evel ma vez tolet an eskorn d'ar c'hi, e oa red roñ ur pluss brassoc'h d'ar brezhoneg ha da sewenadur ar vro ar radio hag en tele... E-pelec'h emaoomp gant ? Bez' e vez, beb sithun, pemp eurvezh ha tregont munutenn e brezhoneg er radio ; en tele, e vez un eurvezh hag eizh munutenn warnugent. Hag echu. Skrivet en deus koulskoude rener FR3 ar rannvro Breizh ez eo mad an traou gant an abadennoù brezhoneg, peogwir e oant bet kresket eus 282% er bloaz-mañ...

Bras eo an trec'h eo zo etre ar c'hamzoù emvelus distaget gant ar gouarnamant, ha stad en traou e gwirionez.

E mis Kerzu, ez eo bet en em vodet Kusul Sewadurel Breizh (ennañ dileuridi eus ar pemp departamant) : petra bennag m'eo dic'halloud ha dinerzh — mes n'eo ket dre e foot —, en deus diviset ar C'husul enorabl-se sevel ur « radio dieub », peogwir, war e vane (ha piw e lârfe ur c'hontrol), n'eo ket fommus awalc'h an abadennoù a vez skignet gant FR3 e Breizh.

Mard eo dre m'eo defo pennoù bras ar C'husul komprenet a-benn ar fin n'ous netra d'ober gant ar « Charte », ez eo an divise-se un dra vad... Mar o deus komprenet a vefe gwelloc'h labouradur ni hon hunan, ha kemer fiziñs e pobl Vreizh, gwelloc'h... Gwir eo ez eo bet douet Gwynfor Evans, un emsaver fêr eus ar Plaid Cymru, d'ober e dro Vreizh ur mis bennag arag bododet ar C'husul. Marteze en deus an emsaver kembread gwaet un tamm mezh bennag d'ar Vretoned ; d'an nebeutañ en deus diskiriet frouez hag a vouezh uhel an doareoù displeat m'ema ar gouarnamant gall, hag a-gozh, o klesk mougañ da vad personelezh Vreizh, dre m' en em ziskouez homañ en ur doare splann dre ar yezh.

Ijia ha faltazi zo e-leizh gant patred Radio-France. Gouezet o deus savet meur a « radio dre doal-arnod », evel « radio-Mayenne » pe « Fréquence-Nord ». Med, an desped d'ar « Charte », netra sort-se euid ar Vretoned. Koulskoude, e Paris, e teure a-benn da gaout ar c'hant pe vez balonetz da gaout. Euid « Radio-Mayenne » ha « Fréquence-Nord » zo bet kavet. Med ober un dra bennag euid Breizh a oa, moarvad, en tu all da c'halloud Paris. Perag ?

Red eo ete chabch penn d'ar vach. Kroget eo Bretoned zo d'hann ober. Savet ez eus bet meur a skol DIWAN. Setu ase an hent mad, hennezh eo an heni a zleomp mont gantañ. Setu ase un doare da dapout krog, diouzhtu, e-barzh ar stur, ha da gerzhed warzu an emrenerezh. Daoust ha moien zo d'ober kemendall euid ur radio dieub ? Bez' e c'heller luitreñ, luitreñ da gentañ, hag ober goude-se : un dra getra a vefe savet ur radio dieub e Jersey (petra lavara Bro-Saoz !), euid stourmañ a-eneb da c'hournamant an Ankoù...

M. T. Loat

Brest : ur c'hevredad tapet ar sifren gantañ

Pa 'z eo bet en em vodet Burew Politikel an UDB e mis Kerzu, en deus diviset divodañ euid ur mare kevredad Brest, ennañ an isili eus Brest hag ar parrestoù tro-dro.

Bez' eo an divodañ-se un dra dibar, eveljust, mes abaoe un nebeud misoù e oa un tammig reus e-diabarzh ar c'hevredad-se : meur a gellig e oa morgousetek an isili aneb ; e-diabarzh mekanik kass-war-raog ar c'hevredad e oa laosk an traou iwe ; unan bennag eus isili ar c'hevredad en doa roet e zile.

An tamm bech'en em gavet e-diabarzh kevredad Brest, n'heller ket nac'h ne vefe ket deuet diwar disunvaniezh en tu kleiz gall er Frâns, hag e Brest endeeun ez eus bet iwe bech'en ti-kêr da vare Pask 1980. Kudennoù personel iwe a zeuas war al leurenn-diabarzh, hag e jech bezañ dis-koulmet aes kêr, ez int bet gwaetañ diwar an awel foll a c'hwezhe en diaoes.

Ar Burew Politikel, goude bezañ en em sonjet, ne c'helle ket gouzout e chomje pelloc'h an traou er stad m'edont ; ne oa ket possib lewel pelloc'h war stad labourerien Bro-Vreizh, ur stad rust meurbeud ewito, peogwir emae o serrañ stalioù-labour e-leizh, o lakaad gwashoc'h c'hoazh an traou e Brest dre ma pouese ponnereoc'h ar yezh kolonial. Ne oa ket possib d'ur c'hevredad chom en e sav netra euid e grignerezh diabarzh ; gwelloc'h divodañ, ha delc'her da chom gant ar daoulagad paret war labourerien ar vro.

Divodet ar c'hevredad, e c'hell an emsaverien stagañ gant en-dro, ha da gentañ oll, en em lakaad da soursial eus diaete-ri labourerien Vrest, karter-ha-karter, stal-labour-ha-stal-labour, parres-ha-parres, euid enebñ gwelloc'h douz politikerezh daonet Giscard.

E mis Genver, en deus ar Burew Politikel, a-unvouezh, advotet a du gant e zivisoù mis Kerzu, ha gant reteradunioù Kendalc'h diwezhañ an UDB : setu ase an hent mad ma te oll isili an UDB mont gantañ. Yach ha kaloneg ez eo hag e chom an UDB : n'eo ket dre ma vez gwelet unan bennag eus re an UDB o c'hwezhañ e fri eo e cheller en em lakaad da gantañ al Libera gant an UDB hag he chass d'ar vered.

Michel François
E-leizh Burew Politikel an UDB, e karg eus aferoù-diabarzh ar strollad.



SON ALUM PENN-LANN

Diouzh an douar pe diouzh ar mor eo e tenne an dud o bewañs. Hiziv an deiz avad, emma toud ar menajoù bihan o vont d'an traoñ. Oñ ober o zalarioù emañ, daoust d'an alusenn dister a vez profet dezeg gant Rouf Frans. Ema ar besketerien vihan, aet/heug gant ar mareoù du, o vevañ disterg awalc'h.

Bez' eo un dra, hag ez eus c'hoazh un tamm nerzh d'hon bro, ar bezhin an heni eo. Kavet e vez ar getenn-vor-se a-leizh war hon aoc'h, bezhin-torr, bezhin troc'h, bezhin-tom, bezhin sech. Goloet hon reter gante. N'eus nemed diw labouradeg koulskoude oñ ober wardro ar goumon-se e Breizh-Izel. Unan zo en Lannilis, eben en Pleuvian. Heni Bleuvian, siwazh, zo un troad ganti barzh an toull, hag egile war ar bord.

Wardro ar bloavezh 1925 eo bet savet an usin-se. Iod, drestoll an heni eo a vese guraet d'ar Chouls-se. Dastumet vese ar bezhin gant an dorn hag ar falz da gentañ, hag gant bagoù goude. Gwraet vese evelse, temz, lousou, « alginat »...

Un hanter bennaked a dud a oa c'hoazh o labourad e labouradeg

Pleuvian, beteg fin ar bloaz tremenet, med ar c'houignoava bet roet dezeg gant renerien Paris (veljust) zo deud da vevañ ur gwall nec'hamant euid labourerien ar goumones.

Kaos zo bremañ e vefe serret ar stal e Mezheven, ha laret zo bet d'ja da darn eus an implijidi chom er gêr. N'houl ket renerien ar SCCA labourad diwar o c'holl, sañset. A-herwez, ar mekanikoù a zo arvu skuzh, ha re diwezed eo da sevel an traou a-newe.

Petra zo kaos o deus gortose keh-dall a-benn laread an dra-se, hag heb ober mann ebet da fressañ an traou. Petra zo bet guraet gant ar goumit tennet a-herz ar bloavezhioù ? N'eo ket bet implijet war an dachenn, se zo sklaer, er-maes ar vro ne laran ket.

Bras eo ezommoù ar Frans euid pezh a sell ar bezhin, hag e vez red importiñ 90% eus ar pezh a vez implijet. Mallaer bras Paris, poort e gol yod a lâr deomp koulskoude penaos e ranker digreskiñ ar pezh a brener er maes eus ar vro. Deus piw a vez guraet goap ?

Ne oa ket stank d'ja al labour 'kosteaz Pleuvian, treutoch c'hoazh vo ar soubenn euid heniennou, ha n'eo ket hepken an dud a labour barzh an usin a deo darnañ, med iwe toud ar re all a ra wardro an afer, ar vezhnerien sartoud, ha tud all er c'hontre.

Pa vo sonet alum gant ar siren, daoust hag-eriv e tevio oll dud ar barrez da reiñ skoad da bootred ha marc'hed usin Penn-Lann ?

Daniel Giraudon

zer dremenet a varv da vev, pa lak paotred ar sinema en o soñj dont da Vreizh da awelin o fennou. Gwechoù all e vez gwelet, a-dreus ur rouedad kirri-pollis, juloded a-zaore evel an H. Giscard, ar ministr Soissons, kusu-lierien an departamant, war-un-dro gant re ar Martinik, o pourmen o c'halite e Lokorn, hag o vont war o foudes dre stradoù strizh ar vouc'h. Gouzoud a ra an dud vad-se, eveljust, bezañ, war ar memes tro, frikoterien a-fesson ha touristid karget a emskiant ; ral a wech avad e vezont gwelet o soursial eus kudennoù an dud, ha kemer poan d'o diskoulmañ, petra bennag m'ema ase koulskoude pal kentañ ar politikerezh.

Kehid ha ma vo an traou er stad m'emañ, kehid ha ma vo ken dister an droed hon eus da vevañ en hor bro ha da vevañ mestri war he flanedenn, e vo daw deomp komz fraezh hag a vouezh uhel. Rag, n'eo ket a-ziwar poultrenn ur mirdi an heni e figloro hon amzer-da-zont, zoken m'eo bet savet ar mirdi-se, euid ul lodenn vad e Lokorn ataw, gant gwennien toull ur Chart blas ar c'hilask-mouezhoù ganti.

Ronan An Henaff

E-KREIS RENKENNADOÙ KERMARIO E KARNAG

50 Artisaner eus Breizh o tiskouez o labourioù benned eus 10^e mitin da 10^e nos

Padou Gwidreth Lar. Goude-annou. Mein benerez. Hozar gavalet. Lincadurioù. Sotr. Akwarellennad. Breizgiñ Gwer. Nodennet. Kizellerzh Krezhin

ARABAD ANKOUAAD :

BEZ' E C'HELLOMP KASS « POBL VREIZH » D'AR SOUDARDED EWID NETRA :

skrivañ d'ar gelouenn

SIZHUNWEZH SKOL VREZHONEG

Aoset e vo, gant ar « SKOL VREZHONEG » (Fédération des Oeuvres Laïques) ur staj brezhoneg : eus al lun 9/2 (9^e) d'ar gwener 13/2 (17^e).

Lec'h : patronaj Iañ Guérin, Brest.

Piw a c'hell dont : bugale diwar 9 bloaz, krennarded, tud en oad.

Tu a vo da gouzdek e-barzh sوليو no vint ket tonunet ; degass peb tra.

Prejaoù : e-barzh ostalerioù marc'had mad.

Misoù : 50L (al levrioù ouzhpenn, direl).

Eurvezhoù labour : 9^e - kreisteiz ; 2^e - 5^e.

Roll al labour : euid ar re a gompen ar pennadig-mañ : eus o brezhoneg d'ar yezh skrivet. Lenn pezhioù-c'hoari gant P.J. Hélias.

Kanouennoù, rimadelloù. Istor ar brezhoneg hag al lennegezh anezhañ.

Euid lakaad e honn : skrivañ da A. Lemerzier, 6, r. Beaumarchais 29200 Brest ; pellg. 44. 89.42.

LENNIT POBL VREIZH

AR BED KELTIEK

2. str. ar Roue Galton
KEMPER

Embannadurioù hag levrioù breizheg
Pladennoù hag artizanek kelteg
Gwelatas ar Fur
Tél. 95.42.82

AL LIAMM

ar gelouenn nemeti o roñ, 6 gwech ar bloaz barzhonegoù, kontadennoù, pennadoù a beb sort ha keleir 80 pajenn e peb nivrenn - Rener : Ronan Huon

komanant : 50 L - Studierien : 35 L

Telzorer-mourer : P. Le Bihan - 16, rue des Fours-a-Chaux ST-SERVAN 35400 ST-MALO - CCP 5349-06 PARIS

AR FALZ

kelaouenn trimisiag an Emsav diasezet gant Yann Sohier, bodet ennañ skolaerion ha kelennerien Vreizh a-du gant ur skol vreizheg ha laik gwirion

Lennit Ar Falz ! Komanant d'Ar Falz ! (AOL euid 4 niv.)

AR FALZ, Str. Kan-er-Gwez - 29245 PLOURIN-MONTRIOLES KRP 430 20 H. ROADZ

D'ar yaou 8 a vis Genveur diwezhañ eo bet c'hoariet, e Pales ar Arzoù hag ar C'hultur (PAC), e Brest, NOMENOE-OE I, pezh-c'hoari brudet ar skrivagner brezhoneg Jakes Riou. Gant Strollad ar Vro Bagan eo bet c'hoariet ar pezh-se, e Brest, ur gêr gall-egrenn ar melestradur hag ar frammar arnez, med breizheg, ha brezhoneg zoken, he c'halon, hec'h ene hag-al luskadoù o tont diouto... Ne oa ket re leun-kouch sal vras ar PAC, med wardro 800 a dud a oa enni memestra, ar pezh a zo un dra bennag, pa soñjer ne vez a-wechoù nemet 20 pe 30 a dud o tont, er sal-se endeeun, da arvestiñ ouzh pezhioù-c'hoari galleg zo. 800 a dud, se zo kâer meurbeud, hag ez eo red lavaret e oa en o zoues Brestis na ouient ket kalz a vrezhoneg, med deuet e oant memestra, abalamour da Jakes Riou, abalamour d'ar brezhoneg, abalamour da Strollad ar Vro Bagan, abalamour da Vreizh...

Red eo, beteg m'emaomp gant an digorou, adlavaret pegen heuet eo bet Brestis o klevet en doa melestradur ar PAC gwraet e seizh gwellañ ewid pellaad Strollad ar Vro Bagan diouzh an templ santel eus ar c'hultur ma'eo ar PAC. Eus ar c'hultur galleg, moarvad. Rag red eo bet d'hor Paganis feurmiñ ar sal d'ar pris ker, evel ma ne veze bet anez eo nemet ur vandannet termaji didalvoud... Gwelloc'h degemer a vez gwraet d'an « tournées Baret », 'm eus aon. Ha piw en ti-kêr zo e karg eus ar PAC, e-toues an adjoentet, ma n'eo ket unan eus ar PS ? Kâer zo ober, gall eo ar PS hag e chomo, ha n'eo ket abalamour ez eus un ostaj pe zaou (daoust hag ez eus daou ?) eus ar c'hultur brezhoneg en o zoues, hag er memes kusul ti-kêr, eo e teu ar PS-se e Breizh da vezañ breizhad a galon hag a efed...

Ahanta, aet eo Strollad ar Vro Bagan hebiou d'an oil skoilhoù, paet en deus ar pris merket, karget en deus sal vras ar PAC, ha roet en deus d'an arwesterien plijadur ha fromadur a-beb-eil, hag a-wechoù war ar memes tro. Un dwezh bras ewid ar brezhoneg. Hag ewid Breizh.

Jakes Riou : e vuhez

En ur choas Nomenoe-oe, n'en deus ket choaset Strollad ar Vro Bagan nag ur pezh aes da c'hoari nag unan aes da vezañ komprenet ragtal... Berzh en deus gwraet koulskoude, hag ez eo red roïd gouc'hemennoù dezañ heb marc'hata : un taol-kâer eo bet an abaden, n'eus ket da doriñ. Ur ger bennag da lennerien POBL VREIZH diwarbenn Jakes Riou. D'an deiz 1^{er} a vis Mae 1899 e teuas J. Riou war an douar, e parres Lotet, damdost da Gastellin... An amzer-se e

NOMENOE-OE !

oa Breizh ur vro katolik meurbeud. Savet e voe Jakes bihan hervez reolennoù al lesenn gristen. Zoken ar Vretoned yaouank na vesent ket kasset d'ur skol gristen dre ma oa heni ebet en o farres, e vese gwraet katekis dezo, hag e vesent, ar baotred, allet da vont da veleg, ha oant krennarded hag a zeske mad, ha ma vesent, war ar memes tro, devoù ha douget da draou ar relijion hag an ilis. Setu, ar pezh a oa d'en em gavoud en em gavas : ur beleg eus ur Gompagnunezh relijius (heni ar « C'halonou Sakr », hanwet « Pèpus ») a zeus beteg Lotet ; gouleun a reas digant ar person pe ar c'hure hag-ehv e oa er barres krennarded c'hoant dezo mont da veleg, ha setu Jakes Riou o vont e-mod-se da heul an Tad Eujen Sambille. Med mont da heul hennezh a oa mont kalz pelloc'h eged Kemper ! Rag, abaoe al lesennoù savet gant Combes e penn kentañ ar c'hantved, ken e-keñver an disparti etre an ilisoù hag ar Stad, ken e-keñver ar Urzhioù relijius, o doa ar re-mañ kavet gwelloc'h, kentoc'h eged plegañ d'al lesenn diwarbenn ar c'hevredgezhioù (1901), en em denañ er-maes eus douarou ur Republik ken di-zoue ha ken fallagr ! Kloardi bihan an Urzh, hag a oa beteghenn e Sarzhaw (Bro-Wened), a gavas bod en tu all d'ar Pirineoù, en tu all d'ar stêr Bidassoa kentoc'h, e Fuenterrabia, pe Ondarribia en euskareg, rag en Euskadi ar C'hreistez em ar gêr-se, tre war harzoù ar Frañs, paravis da Hendaia. Di tre e rankas Jakes Riou mont, da heul an Tad Sambille, war-

un-dro gant meur ha meur a Vreton all... Achu gantañ e studioù eil derez, ez eas Jakes Riou da v/Miranda de Ebro, ma oa eno li-arod (« noviciat ») an Urzh. Ha burzhud ! Tad-Mestr an danvez-leaned, Wilfrid Müller, en doa lakaet en e benn e vije un dra vad, ewid an danvez beleien a oa eno en e garg, addeksiñ pe beurzeskiñ yezh o froviñsoù ma oant bet ganet enno, dezo da c'helloud, diwezatic'h, prezeg ar relijion gatolik d'o c'henvrois... Med ar pezh a c'hoarvezas eo en em dommas spontus Jakes Riou ouzh ar brezhoneg (fevel Youenn Drezen ha Jakes Kerrien, hag a oa aet int-i iwe da heul ar memes Tad Sambille). Ha pa reas e soñj en em denañ, dre ma ne gawe ket dezañ e oa galwet da vont da veleg, en doa Jakes Riou kavet ur relijion all, heni ar brezhoneg, ma vevio ewitañ, kouls lavaret, hivisiken.

Med ne oa ket ar brezhoneg ur yezh da reiñ ur vicher d'un den. Deuet endro da Vreizh, e voe Riou, epad pell, Jakes ar vil vicher... A-benn ar fin e kavas fred e-barzh ar vicher kastenener, er c'h « Courrier du Finistère » da gentañ, ha goude en « Ouest-journal »... Skrivañ a reas e brezhoneg, hag embann : Lizer an hini maro, Troiou kamm Alanig al Louarn, An Ti Satanazet, Geotenn ar Werc'hez, harzhonegoù, ha neuse pezhioù-c'hoari : An Dogan, Gorsedd digor ha Nomenoe-oe !

Tapoud a reas Jakes Riou ur gwall glêvedur, ur c'hlevet hag en doa dija a-benn neuse ket Bretoned-leizh d'ar bed all : an droug-skevent...

Moulet ez eus bet eus al levrenn-mañ, da veza lakaet er c'heuzwerz :

- 15 skouerenn war baper "Holland" niverennet eus 1 da 15.
- 30 skouerenn war "par III Laluma" niverennet eus 16 da 65.
- 250 skouerenn war "Allax-Navarre" niverennet eus 66 da 315.

Moulet ez eus bet ouspenn :

- 7 skouerenn war "Holland" niverennet eus A da G.
- 20 skouerenn war "Allax-Navarre" hep niveradur, ha n'int ket da veza gwerzet.

Skouerenn niv. 287*



Merwel a reas e Kastell-Brien d'ar 14 a vis Genveur 1937, en e eizhved vloaz ha tregont...

Nomenoe-oe !

D'an 20 a vis Gouere 1935, e Douarnenez (bro e bried), e lakeas Jakes Riou ar pik diwezhañ e bezh-c'hoari Nomenoe-oe ! A-benn neuse e oa dija an Ankoù oc'h ober war e dro : bloaz hanter goude, eh achue Jakes Riou e dres war an tamm douar-mañ. Gant e vignon bras Youenn Drezen e voe embannet ar pezh, e stumm ul lev'r kêr meurbeud, treset ar skeudennoù anezañ gant an arzout brestad P. Peron (dara eus ar skeudennoù-se a vo kavet amañ da vont da heul ar pennad), ha lakaet da zont er maes eus ar wask a-drugarez d'ar gevredigezh Skrid ha Skeudenn, e 1941. Siwazh ! ne reas ket vad an diw lizherenn-dal eus an hanw-mañ : SS, a vez gwel't war bajenn-dal ha war gein al lev'r. Arabad ankouand e oa ar bresel oc'h ober e reus d'ar mare-se, hag an Alamanted oc'h ober o mistri hag o labored e Breizh evel en ul lodenn gêr eus ar Frañs. Ouzhpenn kement-se, an diw lizherenn SS-se a oa bet treset en ur mod ma


tegasset da soñj eus SS-ed all : ma oa di-zañjer SS al lev'r, ar re-mañ ne oant ket. Ur fasi psikologel, sur.

Un tamm eus Nomenoe-oe ! — an trede arvest — a oa bet embannet kent, e 1930, war niverenn 21 Gwalarn (pp. 21-37). Warlerc'h ar vouldaden SS, e teuas unan all, bet gwraet gant SAV, Kêr Vreizh, e Paris...

Achu ar bresel, e teuas war e lerc'h ur gwaskerezh rust a-eneb da gement tra breizheg hag brezhoneg (war zigarez e oa aet un dornad Bretoned a-du gant an Nazied — moarvad e oa kollet o skiant vad ganto, a-benn en em lakaad en un emzalc'h ken euzhus —, ha lod al chomet klouar ouzh ar Resistañs)... Tremena ar reas an amzer, hag e teuas an distan, tapet o doa memestra beb a gorfad oan an oll Vretoned a-du gant Breizh hag ar brezhoneg, zoken ma ne oa netra da rebec'h dezo, zoken ma oant chomet leal d'ar Frañs, zoken ma oant aet, abred pe zivrezad, e-barzh ar Resistañs. Rag divrusul e oa bet ar gwaskerezh hag an heskinerezh ha ne c'heller, war zigarez ebet, roïañ an absolvent d'ar re a gassas da benn o labour distruj. Rag, ar pezh a felle d'ar Jakobined, red an istor ganto ewid ur prantad, 'oa dibennañ ur wech ewid mad an « emsav » breizheg ha brezhoneg... Lod neuse a gavas mad en em reutaed en un emzalc'h broadelour rik. Lod all, finnoc'h marteze, pe nebeutoc'h kaloneg, a reas van da bleagañ hag a glaskas tenañ ur mad bennag eus spered frankisour ar Resistañs, a oa d'ar c'houlz-se en e varr. E-toues ar re gentañ e c'heller lakaad, heb arvar, Roparz Hemon (1900-1978), hag a gemeras, e 1947, heñt an harzi : e Dulenn eo e reas e zemeurmas, ha war zouar Iwerzhon eo e tremenas an eil lodenn



eus e vuhez ; e douar Breizh avad emae e relegoù. E-toues an eil rummad e tleer lakaad Armand Keravel, bew c'hoazh, a-drugarez Doue (!), ha yac'h-peck : ar mestr-skol-mañ, hag a zo ennañ danvez ur ministr, heb ministrerezh ebet avad, a bogmas stard, diouzhtu goude ar bresel, ewid saveteiñ ar brezhoneg ha kement a ya d'ober personelezh Vreizh, diouz ar rewin ha diouz ar peurzistruj. Adsevel a reas Ar Falz, un emsav skolarerien ha kelennerien a-berzh Stad, hag ar gelaouenn anezañ. War homañ endeeun e voe embannet, tamm-ha-tamm, arvest-hag-arvest, Nomenoe-oe !, etre 1964 ha 1967. A-benn ar fin neuse e voe adembannet ar pezh-c'hoari en e bezh war ar Vro, e gelaouenn Brud ar Yez hag ar Vro, e 1970 (niv. 35-36), ha staget outañ e kaver ur varnadenn — 12 pajennad stank — bet skrivet e Leningrad gant P.J. Helias etre an 18 hag ar 24 a vis Gouere 1970...



Komanant da gelaouenn c'halleg an ODB

Le Peuple Breton (service abonnements *)

BP 304 - 29273 BRÉST-CEDEX

Hanw hag hanw-badez

Chomlec'h

Boutin : 50 L (1)
Skoaz : 70 L (1)
Estrenvro : 60 L (1)

Amañ an arc'hant dre chekenn-bost (1) dre vandat-lizher (1) dre chekenn-vank (1) CCP RENNES 2365-76

(1) Diverket ar gentañ na servijont ket



Abaden en PAC

War an ton bras eo bet c'hoariet ar pezh gant Strollad ar Vro Bagan : kaniri, sonerezh, al leuren e peb lec'h, ar gouleier, ar c'hinkladurioù, an abaden kan ha sonerezh gant ar strollad Gwalarn araog ar pezh e hunan, kenobererezh Kevrenn Sant-Mark e-diabarzh ar pezh, c'hoari dispar paotred ha merc'hed Strollad ar Vro Bagan, arsa, mad-kaer eo bet peb tra.

Bremañ avad n'ouzon ket hag-ehv eo bet komprenet mad gant an oll oberenn veur Jakes Riou en e fezh. Ha ne gomzan amañ nemed eus ar re a oar brezhoneg. Rag bez ez eo Nomenoe-oe ! ur pezh diaesig da intent ragtal gant neb piw bennag a vefe di-zesk krenn war al lennegezh vrezhoneg, war istor Breizh, war istor an « emsav »... Kavet e vez e-barzh Nomenoe-oe ! damvenegoù a heb sort, en tu all d'ar garantez vras (a weler ennañ splann) en deus bet maget Jakes Riou a-herd ar wech ewid an dud paour ha dister. Ewid e vro iwe, a-dra-sur, mes pas kement-se ewid « paotred an emsav », nag ewid ficherien an istor eus e amzer. Sant-toud a raer, en ur lenn Nomenoe-oe !, n'eo ket heñvel ewid Jakes Riou ar garantez-vro hag ar vroadouriezh. Hag ehv gwirinet don en e vro hag en e yezh, e c'hoarzh laouen Jakes Riou d'ar bed a-bezh, d'ar grouadelezh a-bezh. Un ene franiskan a oa ennañ un tamm : pegen dudius kor al lapoussed en arwest VII ! (Ha pegen kaer eo bet c'hoariet ha kanet an arwest-se gant ar Strollad !). Meur ha meur a wech e vefe red lenn Nomenoe-oe !, araog mont da arwest-ti outañ en teat, hag ur wech deud d'ar ger... Mad en deus gwraet eta

renerien Strollad ar Vro Bagan ingal- lañ etre an dud a oa e sal vras ar PAC ur program eus ar pezh, ennañ ur vrastolenn eus Nomenoe-oe ! Anes d'ar program-se, ne vefe ket bet aes d'un arvester nann-lenneg e brezhoneg heuliañ mad nemed an istor. Petra bennag m'eo laosk an neudenn- se e gwirionez. Plijadur en defe bet memestra, gwir eo, rag gant o c'hoari e teu a-benn ar Baganis-mañ da lakaad n'eus forzh piw ha da c'hoarzhin leizh e gof ha da vezañ fromet e don e galon, a-beb-eil, hag a-wechoù war ar memes tro. Goulc'han Ker- vella, da skwer, n'ouzon ket re vad eus pelec'h eo diwanet, pa weler e zoare c'hoari, meurdeus, goaper, farser ha dirollet war-un-dro. Ur sigoter, ur sorsor, ur furlukin, ur c'haer, ur beleg, ur strobinieller, ur achantour, kement pezh mad a vez kavet gant ar re-mañ a zo gantañ iwe. Seizhved marzhean ar bed-oll, ha medissin ouzhpenn (ha dreistoll !). Ma oar lakaad e glañvourien da c'hoarzhin ha da gaoud plijadur evel m'en deus gwraet en deiz all er PAC, sur e teu buan ar pare dezo. Hag e brezhoneg neuse, heb tamm mezh ebred, heb tamm argaderezh ebred. Hag ur mousc'hoarzh laouen gantañ dalc'hmad, ha n'eo ket un hanter heni c'hoarzh ! Ken e oa entanet gantañ ar saliad en he fezh...

Ur vicher diaes eo ar vicher skrid- varnouriezh... Ma roer mel gant al loa vras, e vo laret ez ur antueg. Ma vez roet un tamm triichin, e vo laret ez eur ur c'hozh pismiger strizh e reor. Ahanta ! Lared a rin peheno ebred ma, santimant-me. Din-me en deus plijet Nomenoe-oe ! Pa kement koulskoude ha Buhez Mikael an Nobletz, hag e oan aet da selled outañ, un noswezh, e-kichen chapel Sant-Yann, e Plougastell, e penn kentañ mis Gouhere 1979... Petra zo kaos ? Martese ez eo Buhez Mikael... aessoc'h da gompren, gwirizennet m'eo muioc'h e-barzh ar c'hudennoù a-vremañ... Nomenoe-oe ! n'eo ket ur pezh gwall aes da intent ragtal. Ne oan ket ewid miret a soñjal e oa, e sal vras ar PAC, e-leizh a vrezhonegerien na ouient netra diwarbenn Nevenoe, Konwoion na diwarbenn Charles ar Moal nag dibann Ballon e 845. Daoust ha kompreno deus ster ar pezh — hag ez eus meur a ster e gwirionez —, en tu all d'ar c'hoarzhadennoù ha d'ar fromadennoù a laka anezo da chom heb kaoud hir o amzer ? N'on ket ewid lared. Da'nn santimant, mad 'vefe bremañ d'an oll re o deus bet gwelet Nomenoe-oe ! lenn hag adlenn ar pezh : unan da vezañ lennet aketus eo ; diwar al lennaden- se e vo soutilloc'h c'hoarzh ar biljadur ha donnoc'h ar fromaden...

F. MORVANNOU

Embannet eo, ur wech ouzhpenn, gant **Emgleo Breiz** pennoberenn **Jakes Riou, Geotenn ar Werches**, ha kaset ez eus bet da b/POBL VREIZH ur skwerenn anezhi gant **Emgleo Breiz**.

Kaos zo ahendall eus **Jakes Riou** war an niverenn-mañ eus POBL VREIZH, peogwir ez eus ur rentañ-kont eus an abaden **Nomenoe-oe!**, ar pezh-c'hoari brezhoneg bet c'hoariet er PAC, e Brest, d'an 8 a vis Genveur.

Ouzhpenn **Geotenn ar Werches** avad a vo kavet el levr 160 p. nevez-moullet war atis **Emgleo Breiz**. Darn eus **barzhonegoù Jakes Riou** zo ennañ iwe, hag un nebeud skridoù all e komz-plaen, gant **Jakes Riou** adarre. Ur studiaden **« Seizh melezour Jakes Riou »**, gant **P.J. Helias** a gaver c'hoazh, ha neuse : **« Eun daolenn verr euz buhez hag oberou Jakes Riou diwar testeni Youenn Drezen »** : n'eo ket sinet ; hag ewid achuiñ, ur roll eus oberennoù **Jakes Riou** bet embannet beteghenn.

Geotenn ar Werches n'eo, e gwirionez, nemed till an danevell verr gantañ eus ur strobad danevelloù bet roet dezo oll till an heni gantañ... War ar gelaouenn **Gwalarn** eo e vo embannet ewid ar wech kentañ an danevell gantañ **Geotenn ar Werches**, war-un-dro gant an eil : **Ur barr-awel** e 1928 eta ; e 1929, e teuas **Yun, Mona, ha Gouel ar Sakramant** ; hag e 1934, **Ar run-heol, Anna Tregidi, Ar gouleñ**. E 1938, dalc'hmad war **Gwalarn**, e vo tro **Lann, embanner al ludo** : Homañ ne oa ket e-diabarzh an dastu- madenn **« Geotenn ar werchez »** bet embannet, e 1934, gant an « ti-embann » hanwet **« Skrid ha Skeudenn »** hag a oa renet gant **Youenn Drezen** ; ne oa en dastumadenn-se nemed seizh danevell e gwirionez, tra ma 'z eus eizh koulskoude (memes heb kentañ **Lann, embanner al ludo**), e-barzh ar pezh a vez gwraet anezañ **Geotenn ar Werches**.

E 1957 e vo embannet gant **Emgleo Breiz**, « adtreget gant an Itron Riou », **Geotenn ar Werchez**.



Lann, embanner al ludo : homañ eo endeeun an embannadur — kresket a galz — a weler adembannet hiziv.

Er memes bloavezh 1957 (« abondance de biens ne nuit pas »), e vo embannet gant **Al Liamm** : **Geotenn ar Werchez ha danevelloù all**.

Prisius eo eveljust embannadur newez **Emgleo Breiz**, dre ma kaver enni, en tu all da **Geotenn ar Werches**, meur a skrid, ken barzhonegoù, ken pezhioù e komz-plaen, eus **Jakes Riou** hag a oa strewet un tamm e peb lec'h ha daes da gaoud. Gouc'hemennoù da **Emgleo Breiz** eta.

Siwazh ! N'eus netra peuvrad er bed-mañ. Forzh pegen prisius eo embannadur **Emgleo Breiz**, ez eus ur si bennag ennañ. En e skrid **« Eun daolenn verr euz buhez hag oberou Jakes Riou diwar testeni Youenn Drezen »**, e kred skrivagnour dianav ar pennad en testeni-se. Un testeni hag a zo bet divar-c'het ewid darn gant un den, un test all, hag a zo bet ehv iwe kensko- liad da **Youenn Drezen** ha da **Jakes Riou** : **Jakes Kerrien** an heni eo. Eus **« An tri a gavas o Breizh e Spagn »**, n'eus nemed **Jakes Kerrien** a gement hag a zo bet c'hoazh. En ur pennad bet moullet war **Skol Vreizh** (niv. 40-41, Genveur-Mezheven 1975, pp. 35-36) (1), dindan an titl **« An tri a gavas o Breizh e Spagn »** endeeun, e skriv **Jakes Kerrien** kement-mañ : « N'eo ket ur romant a skrivin, ur bajenn istor eo diwarbenn Youenn DREZEN ha Jakes RIU. Re alies 'm eus kiewet displegañ an traoù en un doare diwir. DREZEN eo, mechañs, zo pennabeg. En e oberenn : **E koun Jakes Riou** (2), aaset goude marv heañ, e tanevellas penaos RIU hag ehv ha ma e deus da gavoud Breizh e Ondarbia, en tu all d'ar Bidassoa, e 1915-1916. Diouzh ma lavar, e tihunas neuse hor spered keltieg hag e krogomp da enebiñ stard ouzh al leweson c'hall ha latin.

« Penaos e vije gwir ? Ne ouliomp netra a Geltia nag a getelezh, netra koulz lavaret eus Breizh. Ahendall ni 'gare kement lennegezh a studiump, galleg, latin, spagneg, saosneg. Ne oa ennoomp stourm ebred ouzh e leweson nag ar menoz zoken eus se.

« Un toullad Breizhisels e oamp, e-toues kamaraded a Vreizh-Uhel, a Oksania pe Euskadi. Ne vese gwraet kement galleg, na petra 'ta (Notenn 1 : Ur ral a oa kiewet ur ger brezhoneg. Un draig bennag a ziskoueze ur wech an amzer e oa ataw bew hor brzhoneg. Pa vese hanw eus Brantôme — distaget Brantomme — e c'hoarhez Penn-ar-Bedis leizh o genoù).



« DREZEN a lavar en deus bet (ar BARZHAS BREIZH) etre e zaouarn hag eh adskrivias unan eus e varzhonegoù kozh. Ne gredan ket e eus. Med ker buan all hor bije adskrivet ur barzhoneg spagneg kavet braw gaeomp. D'ar mare ma skrivie DREZEN E koun Jakes Riou, en doa e « gael-lenn » a vroadeler. E Ondarbia ne oa ket c'hoazh, anad eo, ar roudeñn gantañ anez.

« War e veno, e poantiomp hon tri helbini war ar brezhoneg. Un hufvre gwraet gant Youenn Vras ! Heni ahanoamp ne roe d'hor yezh an dister- rañ kornig en e spered. N'hor boa na levr na kelaouenn brezhoneg. N'hon eus eskemmet morse DREZEN ha me, na RIU na me, ur ger brezhoneg, na komzet eus hor yezh, e galleg pe vrezhoneg, e-kehid ma 'z omp bet e Ondarbia.

« Penaos en deus gelllet DREZEN

dibunañ seurt sorc'hennoù ? Daou vloaz warnegut a oa abaoe ar fedoù. Ha piw n'her goar, an evnor a gempen an degouezh pell, heb gouzoud dezi. Med ouzhpenn e tie bezañ amañ. Luc'hskeudenner e oa bet Youenn ur pennad hag e ouie e kar an dud ma ve « eliaoset » o skeudenn. Mechañs en deus bet c'hoant kempenn iwe e zrem-ehv ewid an diskennidi. Hed ar wech e voe troet da gærraad an daolenn, dre fougasserezh : henn an- zav a ra pemp gwech e lodenn gantañ **Skol-Iouarn Vez Trebern**. En taol-mañ en doa c'hoant moavad diskouez d'e gennell en doa stourmet a-vihan ewid Breizh hag e oa e-se ur broadeler kozh. Ur vojenn n'eo ken « siwazh »...

Test ewid test, e tleomp ni iwe degemer testeni **Jakes Kerrien** : mad e vefe lenn penn-da-benn ar pennad m'eo tennet diwarañ an arroudeñ-mañ. Mad e vefe iwe da neb piw bennag e teu c'hoant dezañ sevel « un daolenn, hir pe verr, eus buhez hag oberou » n'eus forzh persont skrivagner, dastum pizh an oll desteniou, ha n'eo ket lakaad an istor da chom a-sav e 1938 (2)...

F. MORVANNOU

(1) En e roll ar pennadoù brezhoneg bet moullet e 1975 (diast. **Studi**), en deus gwraet **F. Broedic** ur fasc. (senne humanum est) : lakaet eo pennad **J. Kerrien** war gont « Skol Vreizh n° 43, oct. déc. 1975, pp. 35-36. Red eo rezhañ : n'eus nemed 20 p. en niv. 43-se ; lewacomp mad eta : n° 40-41, janv. aout 1975, pp. 35-36. Diwarbenn **Sihann ar Breur Arturo** gant **Youenn Drezen**, gwelad iwe **Skol Vreizh**, niv. 31, Genveur-Meurzh 1973, pp. 13-16).

(2) E koun **Jakes Riou** bet savet gant **Youenn Drezen** e mis Gouere 1937 (c'hwec'h mis goude marv **Jakes Riou**, zo bet embannet war niv. 110-111 **Gwalarn** (Genveur-C'hwever 1938).

RADIO - U.D.B.
Tel. (16.98) 80.18.47

Paperenn ewid gouleñ mon e-barzh UDB

Hanw hag hanw-badez

Chomlec'h

Gouleñ a ran monañ e-barzh Unvaniezh Demokratel Breizh

D'an (d'ar) 19

Da gas an-dro (troc'het pe adal-ost) da

Sin : UDB B.P. 304 - 29273 BREST-CEDEX



LIZHEROU

Kenvrois ker,

Kenvrois ker,

Bloavezh mad a souhetan a greis kalon da b/POBL VREIZH, d'ar rener anezi, ha d'ar skipailh a boagn gantañ d'he lakaad da zont er-maes. Ur rebech bihan a rin deoc'h, ewid ma c'hellfet gwellaad ar gasetenn : tressadennoù farsus, o tennañ d'ar vuhez pemdezeg, pe d'an darvoudoù a c'hoarvez 'barzh ar vro, a ra diouwer enni, a gav din.

Ronan an Henaff, Lokorn

Ur rebech pe ur goulenn ? Sur eo e vank tressadennoù e-barzh POBL VREIZH, med piw zo kaas ma 'z eo chomet kousket ar re a gasse, gwech ha gwech all, traou 'sort-se d'ar gelaouenn ?

Ar re a ra wardro POBL VREIZH n'int ket tud war o leve, na kennebend tud paeet ewid lakaad ar gelaouenn da zont er-maes. Ur vicher o deus, braw c'hoazh pa ne gemer ket homañ eizh eurwezh ha daou-ugent eus o sizhunvezh. Aes eo rebech, diaessoc'h ober. Setu, ma 'z eus, e Lokorn, tresserien prest da roñ sikour da b/POBL VREIZH ha da lakaad anezi da vezañ brawoc'h ha plijussoc'h, ra gassint o oberennoù da b/POBL VREIZH.

Trugarez d'hor lenner, komananter ha kenlabourer eus Lokorn ewid e reketoù a vloavezh mad : souhetañ da skipailh POBL VREIZH kemendall dezañ ha d'e familh.

POBL VREIZH

Komananter d'ar gelaouenn bolitikel nemeti e brezhoneg penn-da-benn

Pobl Vreizh (service abonnements *)

BP 304 - 29273 BREST-CEDEX

Hanw hag hanw-badez

Chomic'h

a gass e gomanant
Boutin : 40 L (1)
Skoaz : 60 L pe ouzhpenn (1)
Estrenvro : 60 L (1)
(1) Diverzhiñ ar gerioù na servijont ket

Amañ an arc'hant
dra chekenn-bost (1)
dra vandat-lizher (1)
dra chekenn-vank (1)
CCP RENNES 2746-79

Vreizh ouzh Bro-C'hall. Noblañs Vreizh, sujet da noblañs Vro-C'hall (ewel ma vo sujet diwezatac'h bourc'hiselezh Vreizh da vourc'hiselezh Bro-C'hall, ewid abegoù renkade) n'he deus gwraet ken trubardañ ha gwerzhañ Breizh da Vro-C'hall. Goude-se n'he deus ket paouezet bourc'hiselezh Vreizh d'en em zerc'hel evel un enebour gwirion, da gentañ oll en ur ziselel hec'h emskiant vroadel hag he herezh sewenadurel, ha neuse en ur zont da vezañ buan un enebour renkade.

Hiziv an deiz ez eo hor pobl ur bobi divadoù dalc'het en he lezh dindan kraban ar gevalouriezh c'hall hag etrevroadel. Setu 'ta ez eo gwasket diw wech labourerien Vreizh: korvoet evel labourerien gant ar gevalouriezh, ha mac'homet evel Bretoned gant ar impalaouriezh. Ur mennad stard eo hor stourm ewid ur gevredigezh vrezhon sokialour. Red eo d'hor stourm enbrevadennel ha sokialour bezañ termet fraezh ha sklaer. N'on ket mui ewid gousañv, he ne c'housañvin biken en ur Vreizh dieub (pe di-zalc'h), gwaskerezh an den war an den.

Red eo d'hor sokialouriezh bezañ brezhon, ha red e vo he sevel en ur zoujañ gwirvoudoù broadel Breizh. Ne vo hor sokialouriezh nag un dibab amreol, nag ur greizhad emporzhiet, med un dra vev, gwiridigezh don er stourm ewid ar dieubidigezh vroadel. Red e vo dezi ouzhpenn miroad gouidoù stourm an dieubidigezh, ha reiñ d'an oll Vretoned buhez ur bobi dieub.


Setu ar pezh a sonjan, ha c'hwi ? Hetiñ a ran deoc'h ur bloavezh mad ewid 1981.

Va gwellañ sonjoù breizheg. Chañs vad deoc'h.

P.M.

Trugarez vras a lavar POBL VREIZH d'he c'henskriver ewid e lizher ker hir ha ken talvoudus. Hetiñ a ra POBL VREIZH dezañ ur bloavezh mad iwe, dezañ da dañva blas mad pemdezeg ar frankis.

Petra 'soñjompi eus al lizher-se ? War veur a dra em ar wirionez gan-



tañ : gwir eo ez eo Breizh ur vroadelezh gwasket, gwir eo em ar gevalouriezh (capitalisme), etrevroadel ha gall, hag an impalaouriezh c'hall o pomesañ warni eus o oll boues ponner. Gwir eo ez eo aet bourc'hisen Vreizh a-du gant bourchislen Bro-C'hall : n'eus ket a vourc'hiselezh vreizhad, n'eus anezi nemed ur rann, un astenn eus heni Vro-C'hall. Ha pa vefe unan, ne c'hellfemp gousañv e vefe mac'homet (exploité) ganti labourerien Vreizh. Ya, war veur a boent ez omp a-du gant P.M.

Daoust hag e tle an UDB dont da vezañ ur « strollad broadel » ? Bez ez eo unan dija. Med, dre m'eo bet kollet gant hor pobl hec'h emskiant vroadel — goude m'eo bet skarzhet he heni gant bourc'hiselezh Vreizh —, daoust hag e talv ar boan komz dezi kement-se eus ar pezh a zo bet en em gavet pewart-hant vloaz so ? Beteghenn, pobl Vreizh ne oar ket ez eus anezi ur babl. Penaos e teuo dezi en-dro an emskiant-se ? Kentoc'h war an dachenn, pa c'hello hi he hunan digoriñ he daoulagad, ha gwelad ez eus en hor gourenes kudennoù pemdezeg (labour, paeoù, frammadurioù, sewenadurel) na c'hellont ket bet diskoulmet a-eneb dezi hag en diaoes dezi. Un dra vad eo ar c'hentelioù istor, mes piw a vez tizhet ganto ? Un nebeud skolveuridi (kelennerien, studierien). Etre daouarn ar C'hallaoued em ar Deskadurezh : gantio — da lavared eo, gant ar Stad C'hall — e vez paeet ar skolarion, ar gelennerien, ha kement heni a zo « dindan ar gouarnamant ». Diaes meurbed eo lakaad ar spred-dispac'h da ziwanañ e-barzh pennoù ar re a soñj dezo e tleont kement tra d'ur Stad : ewid ar

Vretoned-se, ez eo ar Stad mammenn bemdezeg o lamm-war-raog. N'int ket stank ar re a ra an diforc'h etre o broadelezh (Bretoned) hag o c'heode-dadelezh (Frañsisien). Kendreec'hussoc'h kalz eo krogiñ gant kudenn ur c'hourenes evel Breizh, dileset gant ur Stad kreisennet c'hoant ganti he goullonderiñ a-nebeudoù... Memes strolladoù gall meurbed evel ar PCF e teu ganto, e Breizh d'un nebeutañ, gerioù-stur evel « bewañ, labourad ha divisoùd er vro ». Burchud, pa soñjer pegeñ bras eo an emroadour e-keñver un ugent vloaz so.

Eveljust e karje an UDB bezañ ur strollad broadel kreñv e Breizh. Med, dre wall an istor hag en abeg da veur a zegouez, n'eo ket ewid c'hoazh. Unanet eo an UDB, e-barzh meur a di-kêr, gant ar PS hag ar PCF. Ma 'z eo bet torret, friket an unvaniezh — war dachenn ar Frañs a-bezh — etre ar PS hag ar PCF, e Breizh, er c'hêrioù m'ema ar PS, ar PCF hag an UDB e penn an traoù, ez eo bet un dra vad ewid an UDB — ur strollad anavezet ewid c'hwi bezañ emrener — bezañ bet lakaet war wei d'an

oll, dezi da vezañ gwelloc'h anavezet hag istimet. Braw eo d'un doussnad tud huchal a-boues penn : « Ganeomp-ni em ar wirionez », ma n'eus den ebed da seloù, e chomo ar wirionez etre an daou-zeg-se a dud, hag e raio evel ur blantenn na vez ket douret, e tisec'ho. Red e oa d'an UDB mont gant ar PS hag ar PCF : da gentañ eo bet degemeret ewid ar pezh a oa, un strollad emrenerien eus an tu kleiz, da eil he deus kemeret an UDB perzh e-barzh buhez pemdezeg an tier-kêr : un dra benag eo gouzoud merañ, gwelad e pelec'h emad daesterioù ar Vretoned war an dachenn ; ahendall, lakaet evelse war al leurenn, e c'hell an UDB displegañ he sonjoù, hag embannañ n'eus diskoulmet ebed da gudennoù Breizh en diaoes eus ur sokialouriezh emren, o terc'hel kont eus ar fed m'eo Breizh « ur gumuniezh poblet, speredel, politikel, kevredigezhel hag armerzhel ».

Chañs vad deoc'h iwe, ha bewet Breizh sokialour ha dieub !

POBL VREIZH

Bloavezh mad



**MAR GOUIT
UN TAMM GALLEG,
LENNIT
«LE PEUPLE BRETON»
IWE...**

A-zivoud an impalaerelezh c'hall

Gwezharall, a pa oamp er skol e vese kelennet dimp en en doa ar C'hallaoued unan a vrassañ impalaeriezhioù ar bed-oll : en eilved renk e taent, just àrlerc'h ar Saoson. Ar re a zo oaet àr an oad un tammig o deus bet sellet douzh ar gartenn vras-hont, ma vese gwelet àrnehi tachennoù ec'hon, en Afrik dreistoll, ma stlake a-us dehe ar banniel triliw... A-c'houde ema daet an dichal ; Indochin, Aljeri, ha mem « les Comptoirs de l'Inde » : diskennet ar banniel triliw, mes eraog e oa bet strinket àrnehoñ gwad santel broadelourion an tachennoù-douar, a vevne kass ar C'hallaoued er-maes ha boud mestr en o bro...

Petra 'chom bremañ ag un impaleriezh hag a oa ken bras tregont vlé so c'hoazh ? Nebeud a dra : un nebeud « confetti » àr gartenn ar bed : inisi an Antilles, re ar Meurvor Indian (ar Reunion, rouantelezh M. Debré !), re ar Meurvor Habask (Tahiti, Markis, Kaledonia Newez...). E meur a lec'h enta eh eus bet roet lamm d'ar C'hallaoued, ha distanet d'o nerzh-gwaskiñ ha d'o youl-flastriñ.

Neozh nend eo ket marw ar spered impalaerel e-mesk renerion ar Frañs. Hag e vez komzet bremañ, ged gwir' reson, ag an « newez-trevadennouriezh ». Rag e meur a vro ag an Afrika Zu, oaet da Stad dieub ha dizalc'h (sañset), ema ar C'hallaoued é c'hoari o mistri en adreñv d'ar re a zo bet lakaet e penn an traou. Ha pa vez un tammig bec'h dre eno, e vez galwet a-benn ar C'hallaoued : bet int bet èlse, newez so, ar gwiskamant soudard àr o c'hein, beteg an Tchad, ar Republik Kreisan-Afrik, an Tunisi... Boud ema ar Frañs dalbez en he c'holonioù kozh : nebeud a dra chañchet a-benn ar fin. Ema renerion ar Stadoù newez-se a-du ged ar Frañs, ged renerion ar Frañs, ha boud zo bet liammoù stard meurbed etre ar renour Giscard hag ar renour Bokassa, e « genderw » muiañ karet : nend eo ket achu c'hoazh moarvad afer an diamantoù bet roet e prof da c'h/Giscard ged Bokassa... Bokassa, ur lazher bugale, ha marse un debrer kig tud...

Neozh, bremañ, ewid lakaad ur chañchamant da voned e spered an dud, emañ é klask un enebour newez ; kavet eo bet : Khadafi an heni eo. Sur eo emañ pennrenour ar Libi un den a-eneb krenn d'ar Frañs, ha marse un den gwall zañjerus ewid e genvrois, ewid Afrika, ewid ar Vulsumaned. Boud ema Khadafi e-mesk ar re a gred ar muiañ e-barzh an Islam, ha mem emañ unan a washañ fanatiked an Islam. Da ziwall doc'htoñ zo, sur : ne oui den ebed petra a venn gober. Neozh, re aes e vehe d'ar Frañs gober tamallou da g/Khadafi, dreistoll bremañ p'en deus klasket stagiñ an Tchad douzh e vro-eñv, al Libi. Red eo neozh selled pishoc'h ha moned donnoc'h e-barzh an traou. Ema Khadafi, àr veur a boent ec'h enebiañ douzh impalaererezh ar C'hallaoued. Rag, petra emañ ar C'hallaoued é klask kement-se en Afrik ? Un dra daet da vout prisius ewite : an uranium...

Gwelet e vez ar Frañs enta é reiñ sikour da veur a Stad newez, bet savet diàr an Afrik « galleg » a-ziagent. Ar « sikour »-se nend eo ket unan ràet ged diwez. Pa seller pizh, e weler emañ just awalc'h ar broioù ma vez kavet uranium enne ar re a vez « sikouret » ged ar Frañs. Rag an uranium eh eus dober bras anehoñ ewid an nukleel. Hag an nukleel, peb unan her goui, emañ sod pennoù bras Paris getoñ. Ouzhpenn kement-se, mad eo gouied iwe emañ kenderw-prop Giscard an heni a zo e penn ar gompagnuezh karget d'ober an enklaskoù uranium en Afrik : « Ro da uranium din, ha me 'rày argant dis », setu ar marc'had newez savet etre ar Frañs ha Stadoù yaouank an Afrik ma vez kavet uranium e-barzh kof an douarou aneche. Setu ase fass newez an impalaererezh c'hall.

Un tu 'rall zo d'ar pezh moneiz. 'Kehid ha m'ema Giscard hag e re é làred kàer ged o c'henderwed ag an Afrik, emañ an Afrikaned o hunan, ar Re Zu é toned — pe é klask doned kentoc'h — beteg ar Frañs da labourad. Elreson, nend eo ket afer an impalaererezh c'hall frammiñ broioù kozh an Afrik ewid reiñ labour d'an Afrikaned en o bro ! E-leizh a Afrikaned a vez kavet enta e-diabarzh ar Frañs. A-werso emañ lod aneche eno ; lod arall zo daet just eraog al lesennoù o deus serret an nor douzh al labourision estren. Ged tud ar Portugal, an Turki, ar Maghreb, emañ ar Re Zu darn a « lumpen-proletariat » an Europ kapitalist modern. Ouzhpenn kement-se, ha dreistoll, n'o deus ket an diavaeserion-se an droed da vouezhiñ. An droed o deus da labourad, ged goprou isel, mes an droed da vouezhiñ, narenn. Lojet e vezont e kozh « oaledoù »-divroidi. Hag, ur mis so, setu bec'h bras é sevel e rannbarzh Paris a-zivoud unan ag an oaledoù-se. Kredet o deus maer PCF Vitry, ha rac'h ar pennoù bras ag ar PCF, diskar, ha lakaad diskar oaled Vitry, ewid miroud douzh an divroidi a zoned da lojiñ e-barzh : ged ur bulldozer emañ bet dismantret oaled Vitry. Oaet eo ar PCF en tu 'rall d'ar vezh. Diskouezet en deus e fass a vroadelour gall, diskouezet en deus emañ gouennelour a-benn ar fin. Penaos e c'hellehemp ni amañ, Bretoned ag an tu kleiz, emrenerion ha breuder d'oll ar pobloù gwasket, penaos e c'hellehemp chom mud dirag un torfed sort-se, ha làred « ya, braw eo, mad eo », a pa weler pegen dirollet eo re ar PCF ged o broadelouriezh c'hall ? Ar vezh ruz àr ar PCF en degouez-mañ : n'hellomp ket ni, e mod erbed, digareziñ un taol divalaw sort-se.

Rag ni iwe Bretoned a oui petra eo boud divroet hag harluet. A-c'houde m'ema bet daet an hent-houarn beteg hor bro, kant tregont vlé so bremañ, emañ bet red d'ar Vretoned kemer o zamm malisenn goad ha moned d'ar c'hèrioù bras a-vaes bro, da werzhiñ o nerzh labour. A-c'houde gwerso, en Havr, e Paris, e Rouan, e Diepp hag un tamm peb lec'h eh eus bet Bretoned é labourad a-lazh-korf ewid gounid o boued. Rag en o bro ne oa labour ewite : re stank an dud e-barzh ar vro gozh, ha diviset ged mistri bras an argant hag an industriezh chom heb sevel usinioù enni. Ya, goùd a ra ar Vretoned petra eo moned da vale bro. Goùd a raont petra eo boud kollet e-mesk ur boblañs na gomprenont ket na ne gomzont ar yezh anehi. Goùd a raont petra eo boud mezhekaet a-zivoud o gisioù, o farlant, o doare da weled an traou. Goùd a raont petra eo boud diwriennet, ha treusplantet en un douar na oa ket gwraet ewite.

A-ziàr petra eo bet daet o flanedenn rust, ma n'eo ket a-ziàr an impalaererezh c'hall ? Ar pezh a zo bet en em gavet ged ar Vretoned, hag en em gav c'hoazh, zo iwe ar pezh en em gav ged divroidi an Afrika Zu : uranium zo en o bro ; mad eo an uranium ewid nukleel Giscard ; ewite n'eus namaed un dra d'ober : kemer hent an harlu — kehid ha m'o deus gelllet henn ober —, ha goude-se, degouezet e bro an harlu, boud kemeret evel enebion, « é lemel o labour ged ar Frañsision », hag e vez gwraet gete gwashoc'h ewid ged chass...

Muic'h ewid biskoazh, emañ an UDB hag ar Vretoned dorn-ha-dorn ged ar pobloù gwasket, ged labourision « estren » broioù an Afrik : ya, labour da beb unan en e vro, ha bec'h d'an impalaererezh c'hall ken bew ha ken noasus 'vel biskoazh !

